

## « Gast a baotr ! Aet kuit re abred ! »

Etre an 02 hag an 20 a viz Kalan gouiañv 1992 en doa graet Yannig Aodran ur staj a-barzh ma c'hlas : bugale strollad ar re grenn hag ar re vras.

Get ma c'hensorted, Daniel Doujet ha Yann-Kel Fitamant e oamp kontant degemer ur stajiad hag oc'h penn-tra un den ag ar vro ! E prientiñ ur pezh-c'hoari get strollad ar vro Bagan e oamp d'an termen-se.

Asañtiñ a ran amañ .Ne oamp ket re bout 2 er c'hlas evit kas al labour da benn kar ar pal a oa kannig un arvest get razh ar vugale ag ar skol : istor ar soner hag ar razhed àr al leurenn dirak arvesterion , bugale ar skol-vamm a ranke bout ar razhed a lâre traouigoù a-wezhadoù hag a ranke fichal ivez , met ket ... atav.

Yannig a lâre deomp n'helle ket degouezhout er skol en ur mare gwell. Un degouezh dibar èl diazez e labour . Lakaat ar vugale da zeskiñ testennoù, labourat dre ar c'horf, son dirak o zud ha tud arall. Ur blijadur e oa bet kenlabourat getoñ kar doc'htu en doa lâret deomp bout en e vleud er skol.

Ar blez àrlerc'h dre ma oa aet Yann-Kel da Wened en doa gellet Yannig bout àr ur post er skol evit gober àr-dro ar re vihan.

Dre ma kavemp e vanke deomp dafar hor boa enrollet istorioù SPOT . Setu ni é amprestiñ ur sonenroller get RBG ( ur benveg ag ar choaj a rankemp kaout ! ) hag ur merc'her bennak hor boa enrollet àr-dro 10 istor get skoazell bugale ar skol-vamm : Iwan Bideau ha Marie ar (c'h) Coz.

Na kontant e oamp atav get an traouigoù kaset da benn genomp tamm-ha-tamm ha get ar labour graet get ar vugale er skol pe en diavaez .

Blezadoù goude en doa bet c'hoant Yannig kemm live ha labourat get bugale ar c'hentañ derez , Ar re CM. Aze e oa bet ur c'henlabour dibar etre Daniel ha eñ.

Ur labour frouezhus a vo atav etre Yannig hag e gensorted :

Valerie ar Gall, Annaig ar Gwiban ha Jerom masson.

D'an termen-se hor boa kenlabouret evit ur raktres arall ivez : digoradur skol Diwan Pondi ; ur raktres a-bouez evidomp kar hor bugale deomp-ni a oa en oad bout skoliataet, skol Diwan erbet er vro ! Setu ni é krogiñ a-barzh , é tolpiñ doc'h tu Pondi get Talig Aodran ( maouez Yannig ),Fanch ar Bouedec, Pierrick ar Meut, Dominig Mahe,...evit krouiñ ar c'huzul skoazell e 2000 ha digoriñ ar skol ar blez àrlerc'h harpet da vat

get kevredad Diwan Bro Gwened . Sabrina ar Badezet a vo an hani gentañ é ober àr-dro ar vugale . Nepell goude e arruay Yannig àr e zouarou , e vro evit kenderc'hel aze get ar labour boulc'het ken brav getoñ en Oriant !

Un den kar d'e vro, d'e yezh, d'ar vugale. Aet kuit re abred ! Kenavo deoc'h Yannig !

Beatris ar Moing 19/05/2021



Dizoloiñ loened an dachenn e Kaodan ( 1994)



Àr Enez Groe :Tresiñ ar pezh zo bet gwelet ( 1995 )



Prientiñ gouel TRO-HEOL e Baod evit bugale skolioù ar vro



C'hoariva e Langidig (1994)

skeudennoù : Anne-Marie Courtet

Journal « OUEST France »  
Samedi-dimanche 10-11 juin 2000

Ouest France  
10-11 juin 2000

L'association recherche toujours un local d'accueil  
**Diwan: ouverture prévue en 2001**

Ce jeudi 8, le comité de soutien à Diwan de Pontivy, présidé par François Le Bouedec, tenait une réunion publique au restaurant Probo. L'ouverture de Skol Diwan Pondi en septembre 2001 semble acquise, mais il reste un problème de taille: trouver des locaux!

Créé en février 2000, le comité de soutien, qui compte environ une dizaine de membres, s'était donné pour objectif principal l'ouverture d'une école Diwan à Pontivy. « Nous allons multiplier les réunions publiques pour expliquer aux familles intéressées par la scolarisation de leurs enfants à Diwan, la pédagogie et la méthode dite immersive qui consiste à tout enseigner en breton jusqu'en CE1 », explique le président du comité, le « soutien » François Le Bouedec. Des démarches avec la municipalité, en particulier le maire Jean-Pierre Le

est naturelle, mais nous pensons qu'il y a de la place pour tout le monde. » Yannick Audran et Béatrice Le Moing, enseignants à Diwan, ont quant à eux, expliqué le fonctionnement de l'école, tout en rassurant les parents présents quant aux questions qui leur ont été soumises. « Potentiellement, nous avons une vingtaine d'enfants prêts à être inscrits à Diwan sur Pontivy, ce qui est un bon départ, puisqu'il faut au minimum 12 enfants pour ouvrir une classe. Nous sommes confiants, déterminés et décidés pour une ouverture à la rentrée 2001 », poursuit François Le Bouedec. Le comité de soutien entend multiplier les réunions publiques dans un avenir proche. L'un des problèmes majeurs à traiter avec la municipalité reste la mise à disposition de locaux. « Et nous allons continuer à discuter avec eux de ce problème, afin de le régler au plus vite. »

Une vingtaine de personnes a participé à la réunion publique du comité de soutien au projet d'ouverture d'une école Diwan à Pontivy.

Roch, et l'adjoint aux affaires scolaires, Jean-Paul Jarno, ont d'ores et déjà été entendus. « Mais ces derniers se demandent s'il n'y aura pas de concurrence avec les classes bilingues. Cette méfiance